

## **Son ar bloavezh mat**

Mard oc'h kontant me a gano  
ma n'oc'h ket me 'zihano  
met dont a ran gant kalon vat  
da hetiñ ar bloavezh mat

Ur bloavezh mat a souetañ deoc'h  
bloavezh mat evit an holl  
avañtur vat d'ar re yaouank  
d'ar re gozh bloavezh diboan

D'ar re gozh amzer disourci  
ha yec'hed bepred 'n o zi  
evit gwelet o bugale  
hep trubuilhoù a vuhez

Kalz a joa 'vit an dud yaouank  
yec'hed ha plijadurioù  
tud yaouank, dalc'hmat en em garit  
war an douar peoc'h bepred

Netra n'eus a zalvoudegezh  
'vel esperañs ho puhez  
evit sevel en eürusted  
bugale, gwir Vretoned

Evit an holl martoloded  
'zo en noz 'kreiz ar mor bras  
o c'hounit o zammig bara  
gant kalon de'e, bloavezh mat

Soñj' a ran en holl Vretoned  
deus ar vro bet partiet  
pep hini heuilh e blanedenn  
bloavezh mat de'e holl bepred

Ar re glañv en ospitalioù  
pe er gêr gant o foanioù  
'n o gwele noz ha deiz dalc'het  
yec'hed dezhe vit ar bloavezh

Setu ur bloavezh echuet  
meur a dra zo tremenet  
met evit ar bloavezh nevez  
bloavezh mat d'ar Vretoned